

KANTIG SANT GWENNOLE

Pennmarch



DISKAN :

*D'ar vartoloded Sant Gwennolé,
O Sant Patron, roit ho pennoz,
Evit ma vo sanctel o buhe,
Ha ma zaint holl d'ar baradoz (bis).*

I.

Gwennole, mab Fregan ha Gwenn,
A zo ganet en han Arvor.
Dre-ze gwelloc'h e klev pedenn
Ha kan nerzus an dud a vor.

II.

Doue d'ezan a ro galloud
Da roi buhe d'eun den maro.
Fizians ennan, e peb darvoud,
Goest eo d'ober 'pez a garo.

III.

E manati Landevennec
E sav uhel er zantelez.
Evelse d'eomp e c'hell prezeg,
Gant e skouer vat, pep gwirionez.

IV.

Chomet eo start-en e c'hlanded
'Vel al lili 'touez ar spern-gwenn.
Ni dec'ho 've diouz ar pec'hed,
Gant gras Doue 'vit hon difenn.

V.

Abad sanctel, e bro Gerne
Skignet en d'eus-eur feiz skedus.
Ar memes feiz en hon ene
'Vel eun tour-tan a vo lintrus.

VI.

Laket eo bet gant hon tadou
War hon douar da zant Patron.
Há ni, d'hon tro, war o roudou,
Ni e gars a greiz kalon.

VII.

Rust eo micher ar pesketour.
Riklus eo 'ye kreiz ar gwagou.
Sant Gwennole a ro sikour
D'an neb e bed war ar bagou.

VIII.

War an daoulin 'harz e skeudenn,
Léun a resped 'vit e releg,
'Rog mont d'ar mor grit eur bedenn:
Ne stokot ket ouz ar c'herreg.

IX.

Fizians eta, c'houi, tud a vor,
Dalc'hit bepred ha nerz-kalon.
War ar mor doun 'vel er gouador,
E veih warnoc'h ho sant Patron.

X.

Dindan skoazell sant Gwennole,
Tud ar barrez 'gavo repoz
Pa zigouezo fin a buhe
En e gichen er baradoz.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 6 Mars 1947.

A. Louvière, vic. gén.